



Brest

KLASK KELEIER

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. Pet porzh zo e Brest?	6
2. Peur eo bet serret ar skolioù e Brest?	3
3. Pet den zo o chom e kêr Brest?	1
4. Petra eo ur poull-sec'h?	6
5. Piv eo Loïck Peyron?	6
6. Perak eo bet distrujet Brest e-pad an Eil Brezel-bed?	2
7. Peseurt anv eo ar suporterez hag a respont da c'houlennoù ar skolidi?	5
8. Piv oa ar c'haleourien?	4
9. Da biv eo bet kastell Brest?	8
10. Gant piv e oa dimezet Azenor?	8
11. Betek pelec'h e oa bet Anne, ar suporterez, da welet skipailh Brest o c'hoari?	5
12. Petra a vez kaset ha digaset gant bigi porzh kenwerzh Brest?	6


Evit gellout respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Ar stêr Liger a dremen e kêr Brest.			1
2. Evit kaout boued e-pad ar brezel e oa ret reiñ tikiji.			3
3. Herve Cadiou a oa soudard e-pad an Eil Brezel-bed.			2
4. Gant an tredan ez a en-dro an tramgarr.			7
5. Betek an Eil Brezel-bed e oa galeourien e Brest.			4

Lenn skeudennoù

	Sell ouzh ar skeudennoù er bajenn
1. Peseurt dilhad o doa ar c'haleourien?	4
2. Betek pelec'h ez a bigi ar stal Penn ar Bed?	7
3. Petra eo labour al lestr <i>Abeille Bourbon</i> ?	7
4. War betra e ruilh an tramgarr?	7
5. Perak e oa bet savet barakennoù e Brest?	2
6. Peseurt diforc'h zo etre ar poltridi?	2
7. Peseurt bigi a vez gwelet e porzh Brest?	6-7
8. Petra a vez gwelet war an daolenn bet graet e 1774?	4
9. Petra a vez gwelet war ar poltred?	1
10. A-enep piv e oa Brest o c'hoari war ar poltred e traoñ ar bajenn ?	5

Gerioù-kroaz



1. Ar pezh a vez dougennek gant ar bigi kenwerzh.
2. Hentoù e kêr.
3. Un doare tren, staliet nevez zo e kêr.
4. Lec'h ma vez kempennet al listri.
5. Lec'h ma vez bigi a bep seurt.
6. Un enezenn vihan e-kichen Brest.
7. Ur vag vras.
8. Ar brizonidi hag Azenor zo bet.....
9. Pa vez div vro oc'h en em gannañ.
10. Ar stêr zo o treuziñ Brest.
11. Ar gêr vras 'z eus anv en Taboulin-mañ.
12. En ur skipailh foot ez eus 12.